

## D'an 10 a viz Mae

- D'an deiz-mañ e vez kounaet a-gevret **sant Kalepod**, beleg, **sant Feliks** hag e wreg **santez Blanda**, **sant Simplicius**, senedour, **sant Palmas**, koñsul hag o c'heneiled, merzherion e Roma etre 222 ha 232, da vare Severius Aleksander, lazhet gant an astud pagan.

- E 362, e Benevento e Campania en Italia, da vare an impaler Juluan, merzherenti **sant Gordian** (Lt Gordianus).

Barnour e oa pa voe gonezet d'ar feiz gant sant Genver. Tamallet gant e warlerc'hier e voe jahinet hag en diwezh dibennet. Meneget e vez alies war un dro gant sant **Epimag** (Epimachus) m'eo bet beziet en e gichen war ar Via Latina.

- E 880, merzherenti **santez Solañj**, bugulez er Berri e kavas gwelloc'h mervel eget koll he glanded..

- E 1549, e Montilla en Andalusia, **sant Yann Avila**, beleg, disklêriet doazhour eus an Iliz gant ar pab Benead XVI e 2012.

Ganet e 1502 e-kichen Toledo, e dud a oa anezho Yuzevion kanttroet. Goude studioù uhel e voe beleget hag e lakaas e berzhioù mat a deologour hag a brezeger e servij an Aviel. Pouezañ a rae war ar retvez d'en em anavezout mat ha da anavezout Doue. Gounid a reas kalz kantroidigezhioù en o zouez sant Yann Doue, sant Frañsez Borgia. Gousellet e voe gant an Enkeisierzh hag ez eo en toullbac'h e skrivas an darn vuiañ eus e gelennadurezh.

- E 1889, **sant Damien Veuster**, beleg flandrezat eus Kongregadur Misionerion Kalonoù Santel Jezuz ha Maria, abostolour al lovriddi en Hawaï, marvet war enezenn Molokaï oc'h ober war dro ar re glañv ha tapet gantañ o c'hleñved.

- En Iwerzhon, V<sup>vet</sup> kantved, **sant Vaoran pe Maoran**, eskob, diskibl sant Padrig.

- En Iwerzhon, e 602, **sant Komgall**, abad ha savour abati Bangor, en Iwerzhon. Ganet en Dal Riada, e gwalarn enezenn Vreizh, e vije bet kelenner sant Koulman Veur, sant Mochoemog pe Kevin, hag ivez sant Elouan.

- E Breizh, e 1796, **ar gwenvidig Pêr-Reun Rogue**, beleg eus urzh Sant-Lazar. Evit kenderc'hel gant e waziadezh daoust d'an Dispac'h gall e chomas kuzhet e Gwened hag e voe harzet da boent Nedeleg tra m'edo o kas ar C'hevuniañ d'ur c'hlañvour. Barnet d'ar marv e voe dibennet e Gwened d'an 3 a viz Meurzh 1796.

## D'an 11 a viz Mae

- Er I<sup>añ</sup> kantved, e Santon (Saintes), merzherenti **santez Stella** (Gl. Estelle). He zad a oa gouarnour roman Santon en Akwitania hag he mamm a oa eus un tiegezh drouized illur. Mont a reas da selaou sant Eutrop hag e c'houlennas ar vadeziant. Kensakret da Zoue e nac'has dimeziñ hag e voe lakaet d'ar marv war urzh he zad. Douaret e voe e bez sant Eutrop he doa sebeliet nebeudik a-raok.

- War-dro 477, **sant Mamerzh** (Gl. Mamert), arc'heskob Viena e Galia. Diazezañ a reas an Eriuladoù pe *Rogasionoù*, anezho tri devezh aspediñ ha yun kent Yaou Bask evit goulenn bennozh Doue war an trevadoù ha war an hollved ha pellaat ar gwallreuzioù. Goubonnet e voent evit an Iliz hollvedel gant ar pab Leon III en IX<sup>vet</sup> kantved.

- E 994, **sant Maieul**, abad Cluny a strivas da adneveziñ manatioù e-leizh e Bro-C'hall hag en Italia.

- E Breizh, e deroù ar VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Tudi**, abad.

Diskibl sant Maodez adalek e yaouankiz e savas un abati e 494 el lec'h anvet Enez-Tudi nepell diouzh Loktudi. Hervez hengoun Kemper e ambrougas sant Kaourintin ha sant Gwennole pa'z ejont da dTuron (Teurgn). Ur wezh eskobet gant sant Varzhin e roas sant Kaourintin ar bennozh abadel da sant Gwennole ha da sant Tudi.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **Sant Gwegan, Gwegan pe Gwegon**, manac'h, diskibl sant Gwennole. Ur chapel hiziv rivinet a oa gouestlet dezhañ e Gulven e Edern nepell diouzh hini sant Gwennole.

- E Breizh, e 659, **sant Henwezenn**, eskob Gwened.

- E Breizh, e 570, er C'hroesti en Arzhon-Rewiz, dizoloidigezh relegoù sant Gweltaz.

## **D'an 12 a viz Mae**

- E 304, e Roma, da vare Diocletianus, merzherenti **sant Pankras**, ur bugel pevarzek vloaz. Ar pab sant Simnag a savas ur brientiliz war bez ar merzher, hag ar pab sant Gregor Veur a vrudas e zeoliegzh.

- E 304, e Roma, **sant Denez**, eontr ha gward sant Pankras. Harzet abalamour d'e feiz e varvas en toullbac'h.

- War-dro 304-305 e Roma, merzherenti **ar sent Nereus hag Achilleus**, gouez d'ar pab sant Damaz e oant soudarded o daou e lu an impalaer Diocletianus pa voent gonezet d'ar feiz o welout kalonegezh ar gristenion. Teurel a rejont neuze o skoedoù, o spegoù hag o c'hlec'hennoù-gouzoug hag ez embannjont o feiz er C'hrist. Dibennet e voent hag o c'horfoù sebeliet e bered Domitilh.

- War-dro 688, ganedigezh en neñvoù **santez Rigtrud**, abadez e Flañdrez.

Goude marv he gwaz Adalbad, kuzuliet gant sant Aman, ez eas da vanati Marsenne (Marchiennes) e-kichen Camarac (Cambrai) lec'h m'edo endeo he zri merc'h. Diuzet da abadez e renas ar gumuniezh er reizhded hag er furnezh.

- E 733, **sant Jermen Kêrgustentin**, eskob.

Brudet evit e skiant hag e vertuzioù e stourmas, gant harp ar pab Gregor II, a-enep an impalaer Leon an Isaorian en doa gourbannet ul lezenn a-enep ar skeudennoù santel.

- E 1577, **santez Katarina Cardone**, penitiourez e Bro-Spagn.

Genidik eus Napoli e vevas e lez Fulub II a Vro-Spagn lec'h ma oa diwallerez ar yaouaer ha lec'h ma souezhas an holl dre he buhez a binijenn. War ali sant Pêr Alcantara ez eas e-touez Penitiourion Sant Eosten.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Kongar a gCongresbury**, abad e Breizh-Veur hag e Kembre.

- En Iwerzhon, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Erc'h**, manac'h en Iwerzhon.

- En Iwerzhon : **sant Hernin** (Iw. Isernin), eskob er V<sup>vet</sup> kantved, ha **sant Bearnaska**, manac'h.

## D'an 13 a viz Mae

- E 384, e Flandrez (Belgia), **sant Servez**, eskob Tongeren (Tongres) genidik eus Armenia. Stourm a reas, a-gevret gant sant Atanaz Aleksandria harluet e Trevires (Trier), evit difenn ar reizhkredenn e doueelezh Komz Doue e-tal an disivoud ariat. Brudet e voe e Breizh a-drugarez d'ar birc'hirinadenn a sache kalz Bretoned war bez sant Amand e Maestricht hag e kreskas e gehelerezh dre ma veze pedet a-enep da rev an nevez-amzer pergen evit gwareziñ an hadegoù lin.

- E 774, e-kichen Luik e Gwallonia, **santez Rolenda**, gwerc'hez. Hag hi merc'h Desiderius, roue al Lombarded, e voe roet en dimeziñ gant he zad da Oger, mab roue Bro-Skos. Tec'hout a reas kuit avat digant an aotrouion skosat he c'hase d'he emvenner hag e klaskas tizhout manati Santez-Ursula Kolun. Hogen, divi e varvas e Villers-Poterie, nepell diouzh Luik.

- E 931, e Kordoba, da vare aloubadeg ar Sarrazined, merzherenti **ar sent Argentea ha Vulfran** a e voent jahinet ha lakaet d'ar marv abalamour d'o fealded d'ar C'Hrist.

- **Gouel Itron Varia Fatima**. Etre an 13 a viz Mae hag a 13 a viz Here 1917 en em ziskouezas ar Werc'hez Vari er Portugal da dri mèsærig, Francisco, he c'hoar Jacinta hag o c'heniterv *Lúcia* o fiziout enno kemennoù a bouez evit an Iliz hag ar bed.

- E Kembre, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Mael**, manac'h, diskibl sant Kadvan ha keneil sant Sulian.

- E Breizh, e Gozlin (Josilin): **Itron Varia an Drezeg (Beatae Mariae Virginis de Rubeto)**. Er bloaz 808, war ribl ar stêr Oud, e kreisteiz Devnon, edo ur c'houer o tiffraostañ un tamm douar distuz pa zizoloas e-kreiz an drez un delwenn eus ar Werc'hez Vari, anezhi un aspadenn eus ur santual aet en e boull abaoe pell. Engroeziou a dud a zegouezhas ha parañsoù e-leizh a c'hoarvezas. Brudet eo santual Itron-Varia an Drezeg dre Vreizh a-bezh. Ar pardon a veze lidet gwezhall da-geñver ar Pantekost hag hiviziken d'an 8 a viz Gwengolo.

- E Breizh, e 1645, **ar pac'hiad Iwan Nikolazig**, labourer-douar en em ziskouezas santez Anna dezhañ e Keranna-Wened.

## D'ar 14 a viz Mae

- War-dro ar bloaz a c'hras 64, merzherenti **sant Mazheaz**, Abostol. Heuliet en doa an Arloz adalek e vadeziant gant Yann betek an deiz ma savas d'an neñvoù, neuze e voe dibabet gant an Ebestel evit kemer lec'h Judaz ha dont da vezañ unan eus an Daouzek. Hervez an hengoun e tegasas an Aviel da Etiopia hag eno eo e roas e vuhez evit ar C'hrist. E relegoù a voe degaset da Roma gant santez Helena ha fiziet er vrientiliz Santa Maria Magiore.

- War-dro 160, e rannvro Damask, da vare an impalaer Antoninus, merzherenti **sant Viktor**, soudard roman genidik eus Italia. Diskuliet e voe abalamour d'e feiz e Jezuz Krist ha jahinet e liesdoare gant ar barnour Sebastian. En dibenn e voe lakaet da evañ ur meskaj gwinegr gant raz, ha neuze e voe skourret dre e dreid betek ar marv.

- War-dro 160, merzherenti **santez Stefanid pe Kurunenn**. Gwreg ur milour e oa pa voe bamet gant habaskted sant Viktor a zalc'he d'e feiz daoust d'ar jahinerezh.

Dre ma skoras ar merzher en e boanioù, e voe harzet d'he zro hag e embannas he feiz. Neuze e voe staget etre div balmezenn daoubleget, dalc'het gant kerdin, hag a voe dieubet en un taol a-benn regiñ korf ar verzherez.

- War-dro 303, e Ankyr (Ankara) e Bro-c'hGalatia, merzherenti **sant Theodod** hag e geneiled niverus.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Karadeg**, penitiour, mignon sant Gwenhael. E buhez sant Gwenhael bet skrivet, war a hañval, nebeut goude 818, e konter ez eas, o kuitaat e vanati en enez Groe, da weladenniñ peniti ar manac'h Karadeg a oa ur mignon dezhañ ha ma plije dezhañ kendivizout gantañ. Ne ouezer ket avat pelec'h edo o chom ar penitiour. Hervez un hengoun lec'hel e parrez Treve, e Bro-Loudieg, e konter e oa peniti sant Karadeg lec'h m'emañ chapel Sant-Pêr hag e kaver dres e-kichen met war diriad eskobiezh Kernev parrez Sant-Karadeg.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Pever**, beleg.

- En Iwerzhon, e 638, **sant Carthag** (Carthach, Cuba pe Mochuda), abad hag eskob Lios Mór.

## D'ar 15 a viz Mae

- Gouel **ar Seizh Sant abostolourion Spagn - ar sent Torkad, Tesifont, Segond, Indales, Sesil, Hezig hag Eufraz** - a vije bet kavandidi an abostol sant Jakez bet kaset gant sant Pêr ha sant Paol.

Hervez danevell *Translatio sancti Jacob* e tegasjont korf sant Jakez da C'halsia hag hervez Kanenn Rolant e oant Bretoned anezho.

- E 251, e Lámpsakos en Hellespont pe Dardanel, en Azia-Vihanañ merzherenti **santez Denesa** (Gl. Denise), lakaet d'ar marv d'he 16 bloaz a-gevret gant he c'heneiled **ar sent Pêr, Andrev ha Paol**.

- War-dro 535, distro da Zoue ene **sant Cabeb pe Elesbaan**, roue en Ethiopia. Stourm a reas ouzh atebeion merzherenti ar gristenion. Da vare an impalaer Justin e kasas e gurunenn da Jeruzalem hag e renas ar vuhez vanac'h betek mervel e peoc'h an Aotrou.

- E 1130, **sant Izidor**, kouer e Madrid.

Gant e bried, ar wenvidigez Turibia, e labouras an douar gant kalon hag e tastumas gant habaskted frouezh an neñv muioc'h c'hoazh eget re an douar, o kinnig skouer ur vuhez santel. Pemp kantved goude e varv e voe adkavet e gorf dibistik hag e voe savet d'an Aoteroù gant ar pab Gregor XV e 1622, d'an hevelep deiz ha santez Tereza Avila, sant Frañsez Zavier ha sant Fulub Neri.

- War-dro 1180, **sant Iverzin** (Gl. Avertin), diagon saoz. Pedet e vez enep ar gernad, ar boan benn hag ar mezevennoù.

Hag eñ chaloni reoliek eus Kongregadur ar Jilbertined e Bro-Saoz e ambrougas sant Tomaz Becket arc'heskob Canterbury e Teurng evit ur senez. Goude muntridigezh hemañ en em dennas nepell diouzh Teurng evit ren ar vuhez penitiour lec'h m'emañ bremañ Saint-Avertin.

- E 1863, e Betharram e Bro-Euskadi, **sant Mikael Garicoits**, beleg, diazeour Kevarzhe Beleion Kalon Sakr Jezuz hag en astennas betek an Amerika latinek.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Privael**, penitiour ha diagon e Kernev, keneil sant Kaourintin. E-pad pell e vevas Privael e Santoz er Menez Du hag eno e veze gweladennet ingal gant sant Kaourintin.

- E Breizh, er VII<sup>vet</sup> kantved, **sant Nerin**, eskob, ganet e Kembre, marvet e Plounerin e Bro-Dreger.
- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Gerebern** (Gl. Gerebrand), beleg ha merzher iwerzhonat. Aluzenner santez Dimfna, priñsez a Vro-Iwerzhon, en doa ambrouget hag eñ deuet kozh koulskoude, betek Belgia lec'h ma voent kavet gant kannaded tad houmañ ha dibennet ganto.
- E 733, **sant Brizhun – Bercthun** e saozneg, kentañ abad Beverley e Bro-Saoz, diskibl an diazeour sant Yann, eskob Exham ha da c'houde Evrog (York). Moarvat e oa breizhat a orin.

## D'ar 16 a viz Mae

- War-dro 375, e Persia, merzherenti **ar sent Abdas hag Ebed-Jezuz**, eskibion a voe lakaet d'ar marv a-gevret gant c'hwezek beleg, nav diagon, c'hwec'h manac'h ha seizh manac'hez, da vare ar roue Sapor II. Da gentañ gwasket etre plankennoù koad betek lakaat o eskern da darzhañ e voent goude-se dibennet.
- E 304, merzherenti **sant Peregrin** (Gl. Pèlerin) Autesiodurum, eskob. Kiminiad kaset da Roma gant ar beleg Meurzh, an diagon Korkom, Jovian ha Jovinian. En Autesiodurum e savjont ur gumuniezh. Peregrin a yeas da aviolañ rannvro Puisaye hag e voe merzheriet e Baugiacus (hiziv Bouhy) dre ma tistroe an dud diouzh ar baganiezh.
- Er IV<sup>re</sup> kantved, e bro Aotrikon (Chartrez) e Bro-C'hall, merzherenti **sant Eman**. Genidik eus Galatia e teuas da Augustodunum (Autun) dedennet ma voe gant ur gumuniezh menec'h o tont eus Kaezarea Kappadokea hag a heulie reolenn sant Bazil. Edo oc'h aviolañ rannvro Chartrez pa voe drouklazhet gant paganed lec'h m'emañ bourc'h Saint-Eman a-hiziv.
- War-dro ar bloaz a c'hras 600, sant **Honoratus** (Gl. Honoré), eskob Ambianos (Amiens), patrom ar varaerion. Ganet e kontelezh Ponthieu, en hanternoz Bro-C'hall, e oa ur paotr fourgat anezhañ pa lavaras d'e vagerez e felle dezhañ mont da veleg. Edo hi o poazhañ bara hag e lavaras : “*Ha pa vo delioù d'am fal e vi eskob.*” Ha dirak he daoulagad dispourbellet e krogas ar bal da c'hlasveziñ.
  - E 616, **Merzherion Minic'hi Sant-Sabas e Palestina**, pevar manac'h ha daou-ugent a voe drouklazhet gant Persed da vare ren an impalaer Heraclius.
- E 1215, e Bourdel, **ar gwenvidig Simon Stock**, beleg karmezat. Da gentañ penitiour e Bro-Saoz, ez eas da vanac'h en urzh ar Garmezidi. Ar Werc'hez Vari a roas dezhañ ar skapular a skignas a-hed e abostolerezh. Anvet Jeneral an Urzh e varvas p'edo o weladenniñ kouentoù Bro-C'hall.
- E 1954, e toullbac'h Jilava e Roumania, distro da Zoue ene **ar gwenvidig Vladimir Ghika**, beleg. Ganet e voe e Kêrgustentin lec'h ma oa e dad kannadour roumaniat en Impalaeriezh ottoman. Hag eñ eus un tiegezh Phanarioted a voe e penn Moldavia ha Valacchia etre ar XVII<sup>vet</sup> hag an XIX<sup>vet</sup> kantved, e voe gounezet d'ar gatologiezh hag e voe urzhiet beleg. Anvet protonoter abostolek gant Pius XI, e sevenas meur a gefridi a-raok distreiñ da Roumania lec'h ma voe harzet gant ar polis komunour, jahinet ha gwallgaset betek mervel e dienez ur c'hlañvdi.
- En Iwerzhon, war-dro 578, **sant Brendan**, abad ha savour manati Clúain Fearta.

Ganet en Ard Macha (Armagh) en Iwerzhon war-dro 484, e voe badezet ha kelennet gant an eskob sant Erc'h, kent mont da vanac'h e manati Clúain Fois lec'h ma voe diskibl sant Yarlad. Mont a reas da Vro-Gembre en abati Llancarfan a veze renet gant sant Kadog. Eno edo e filhor sant Maloù hag ivez sant Gweltaz. Deuet d'an Arvorig gant sant Maloù e savas gantañ abati Aled ha marteze un abati en Aber Arc'h. Un *imramer* a voe Brendan ha brudet-kenañ dre Europa a-bezh danevell e veajoù : *Navigatio Sancti Brendani abbatis*.

- En Iwerzhon, er VII<sup>vet</sup> kantved, **sant Karadeg** (Iw. Carthach), lesanvet *ar Yaouaer*, manac'h e Bangor ha da c'houde abad Lios Mór.

- E Kembre, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Isvael**, eskob diskibl sant Devrig.

- E 1781, e Redon, **an Tad Juluan Dumoustier**, beleg eus eskobiezh Gwened, skouerius a vertuzioù hag a uvelded.



Sant Brendan